

YF_0056_Da gregin ha da echuin

Da gregin:

gand eun dañs Kerne (gavotenn ar menez a zo nevez a-walc'h ha troet diwar ar galleg). Poullaouen.

Deuit da zañsal tud yaouank p'emaon krog da ganañ
Stokomp hon treid d'an douar ken a greno ar ger-mañ

Stokomp hon treid d'an douar hag ar ger-mañ a greno,
Hag ar saout 'barzh o c'hreier, marteze a richano.

Rak me n'on deuet amañ d'ober troiou en-dro
Na kennebeud gand plijadur evid uzañ ma botou.

Med ken trist ma 'flanedenn, aet on skuizh o ouelañ,
Ha ken bras eo ma anken, me en em lak da ganañ.

Neuze e vez kanet un ton gavotenn bennag.....

Ha da echuiñ:

E-barzh ar ger-mañ a zo saout kozh o deus kerniou ridet.
E-barzh ar ger-mañ a zo merc'hed ne garont ket ar baotred !

Ne garont ket ar baotred nemed ar re o-deus leve,
Ha me paour-kaezh gleb-dour-teil n'on ket karet gante.

Ha me paour-kaezh gleb-dour-teil a zo eus lein ar menez,
A zo merket war ma zal "Vive la Liberte" !

Sec'het eo ma muzellou, aet eo ma beg a-dreuz,
Me ne c'hallan mui kanañ gant ar sec'hed em eus.

(Me ne c'hallan mui kanañ gant ar sec'hed em eus,
Kar ma zeod 'zo 'n em genou ha kazimant aet a-dreuz !)